



Skolig al Louarn

Gant Jean-Yves Kervarc'heg, Claudie Quénet,
Anna Lefebvre ha Margo ar Wern

Petra ' vo graet ?

Bale diouzh ar mintin, gweladenniñ lec'hioù heverk eus glad ar vro, pe liammet ouzh un tem bennak goude merenn (ur vag, ur porzh-mor, ur plas, ur vengleuz, skluzioù ar ganol, ur c'hoad, ur menez ...) ha kejañ ouzh brezhonegerien ezed a bep seurt.




Kaozeal, kanañ, deskiñ ...

Desket e vo gerioù, troioù-lavar, ha lusket e vo an troioù-bale gant kanaouennoù, marvailhoù ...

Ma fell deoc'h kinnig un ton, ur gontadenn d'ar strollad, na chomit ket etre daou soñj !

Mat da c'houzout :

- An emgav a vo bep mintin da 8e45 er sal gouestlet d'ar strollad.
- Evit mirout na vefe produet re a lastez gant ar pik-nik e vo goulennet gant pep stajiad ez degas h'e asied, armoù kegin, serviedenn, boutailh ha gwerenn mat da adimplijout.
- Kenwuret e vo ar muiañ ar gwellañ evit tizhout lec'hioù hon emgavioù.



- Ma vez tud hag a rank bezañ el lise a-raok 5e gm e vo ret dezho en em aozañ.
- Ar baleadennoù a vo bemdez etre 6 ha 10 kilometr. Gwelloc'h eo bezañ en ur stad fizikel yac'h a-walc'h.
- Hag evel-just, degasit ho peadra evit bale dindan ar seizh avel : botoù-bale gant loeroù, tok pe gasketenn, lunedoù-heol, chupenn-c'hlav, dienn-heol, dilhad-kouronkañ ...

EVEZHIADENN :

An devezhioù kaset gant Skolig al Louarn a vo bemdez eus 9e da 5e gm, war-bouez d'ar Yaou goude merenn ma vez aozet kejadennoù « Tud eus ar vro ». Ar stajidi o do dibabet mont gant ur rummad diouzh temoù ne c'hellint ket kemer perzh er c'hentelioù brezhonek kinniget diouzh live an dud. Degemeret e vo er strollad Skolig al Louarn stajidi bet o heuliañ stajoù gant KEAV er bloavezhioù kent er strolladoù 3, 4, pe 5 pe er rummadoù.